

## **Marvaill an dillad aour**

### **An displeger**

Kalz tud a zo souezet o weled pegen kaer eo bet gwisket an dud er vro-Vigoudenn. Beteg ma tarzas warnom, siwaz, ar brezel pevarzeg, e veze gwelet ar merhed Bigoudenned hag ar Vigouterien, o gwazed, o tiskouez o dillajou aour er pardonioù braz. Ken kaer e oant, an dud-se, ma ne oa ket neudet kaerroh bannelioù an Itron Varia eged o broziou hag o chupennou. N'eo ket abalamour e oant pinvidikoh eged ar re all, med a-viskoaz int bet douget war an traou brao, war ar "cheuh", evel ma lavaront. Hogen, marteze, e rafe plijadur deoh kleved diganin penaoz ha perag a zo bet savet kemend a neud aour war dillad ar Bigoudenned, hervez m'eo bet kontet din an dra, bremañ 'z eus eun ugent vloaz bennag gand eun den koz war palud Tronoen. Ha ma n'eo ket gwir ar vojenn, ken kaer eo da gleved ma n'ho-po ket c'hoant da damall ahanon e gaou.

\*

\*\*

### **An displeger**

Eur wech, e oan o vale war ar Vilienn vraz a gas deuz Pennhorz da Benmarh. Ar mor war an tu dehou, ar palud war an tu kleiz. E oan erru dirag chapel Tronoen, e leh ma weler ar hosa kalvar a zo c'hoaz en e zav war douar Breiz, eur halvar mên-greun ma zo bet kizellet warnañ penn-da-benn istor or Zalver adaleg e hanedigez beteg e varo. Hag azezet, e gein ouz ar halvar, skoachet brao da heolikad, e kavis eun den koz, eun tamm baro louedet war e chodou, gwisket paour gand dillad pemdez, nemed e oa gantañ, war e stomok, eur jiletenn vigoudenn neudet aour he liou ken flamm ma kredis e oa-hi nevez hag o tond diouz daouarn ar hemener. Ha me ha tostaad ouz an hini koz.

### **An hini koz**

Ha neuze, ma faotr, emer o pourmen war an aod ?

### **An displeger**

Ya, eontr, o pourmen emañ, gand an amzer vraz.

### **An hini koz**

Brao eo an amzer, feiz. Eun tammig avel a zo ganti, koulskoude.

### **An displeger**

Avel a zo, ya. Ar palud a zo dizolo.

### **An hini koz**

Ba ! An avel a lak ar gwad da vervi. Evid ar re yaouank, da vihanna. Me a zo eet kozig. An anoued a wask ahanon buan a-walh. Bez' e rankan skoacha mad.

### **An displeger**

Amañ ho-peus kavet eur repu mad.

### **An hini koz**

Eur repu, ya. Ha kompagnunez am-eus amañ evel ma ne vez ket kavet aliez. Sellit, paotr yaouank, pegement a dud a zo en-dro din : Judevien, soudarded, ebestel, hag an Itron Varia hag ar Zalver, oll skeudennou mên kalvar Tronoen. Ar re-ze eo va zud hag en o zouez emañ er Baradoz. Ha ken koz m'on deut, a-wechou e kred din on eet da vên ivez, ken dizehet eo va horv ha ken kaled va izili.

### **An displeger**

Ya, p'on tostaet ouzoh, eontr koz, on bet kichenn beza lutinet ganeoh. Gwir 'vad ! Difiñv evel ma'z oh, gand ho tillad dizlivet, heñvel e oah ouz ar skeudennou mên a zo a-uz d'ho penn. Gwelloh c'hoaz, ar jiletenn neudet a zo ganeoh war ho stomok a ra dres evel ar man aour a sked war ar halvar dindan an heol.

### **An hini koz**

Paotr yaouank, c'hwi ho-peus daoulagad da zelled ouz an traou. Bez' ez eus tud all hag a zell gand o genou. Mad ! Azezit em hichenn, m'ho-peus amzer da chom da zelaou rezoniou eun den koz.

### **An displeger**

Chom a ran, eontr. O selaou ar re goz, e heller dastum daouwennegad furnez a-raog ar zeizdaletoh. Med souezet on gand ar jiletenn a zo warnoh. Eur pezh tamm dillad e-giz hennez ne vez ket kavet aliez etre Plozeved ha Penmarh.

### **An hini koz**

E ! E ! Eur pezh tamm dillad e-giz hennez ne vez ket gwelet biskoaz na ne vo gwelet mui birviken. Hennez a zo mezer gwiet e kêr Moñtoban, ouspenn pevar-ugent vloaz 'zo, hag an neud aour a zo bet tennet warno gand nadoz va zad, Gourgon ar Hemener, Doue d'e bardono. Ken fresk ha ken flamm eo c'hoaz an neud ha d'an deiz kenta, pezh a zo eur burzud kaer, neketa ?

### **An displeger**

Eo. Marteze n'eo ket bet douget aliez ar jiletenn ?

### **An hini koz**

Douget eo bet ken aliez ma zo bet eur pardon pe eun eured braz etre Ploneour ha Plomeur. Douget eo ganin-me bemdez abaoe bloaveziou. Douget eo bet a-raog gand va zad e-pad pell amzer. Ha douget eo bet da genta gand va mamm vuia-karet, Barbaig ar Palud, ar vrava plah yaouank a zo bet gwelet biskoaz er Vro-Vigoudenn. A-raog beza jiletenn gwaz, eo bet jiletenn vaouez, eur jiletenn dispar, ar jiletenn genta a zo bet neudet penn-da-benn gand neud aour evid ar baourra plah he-deus bevet war an tamm douar-mañ. Klevet ho-peus, paotr yaouank, penaoz e leusker beb bloaz, war ar wezenn avalou, an aval a zo war an uhella brank. An aval-ze a vez greet outañ "mamm an avalou" ha ma tegouez gantañ koueza war an douar pe beza distaget gand eun dorn bennag, ar wezenn a zizeh hag a deu da veza gaonah, difrouez, e-giz fiezenn an Testamant. Ar jiletenn-mañ 'zo mamm ar jiletennou, an hini he-deus savet gouenn. Keit ha ma vo douget-hi gand gwaz pe vaouez, er Vro-Vigoudenn, e vo kavet kemenerien da

zevel neud aour war ar mezer du.

### **An displeger**

Mamm ar jiletennou ! Souezusa tra am-eus klevet. Med marteze n'eo nemed eur marvaill, eur goñchenn e-giz koñchennou all a glever digand an dud koz p'emaint o tomma e-tal an tan, e-pad ar goañv du.

### **An hini koz**

Eur goñchenn eo hag eur goñchenn n'eo ket. M'ho-peus c'hoant hag amzer da gleved penn-da-benn, paotr yaouank, doare mamm ar jiletennou, me a gonto deoh penaoz va zad, Gourgon ar Hemener, dre garantez evid va mamm, Barbaig ar Palud, ar vrava hag ar baourra plah a vevas biskoaz etre Pont-'n-Abad hag ar Vilienn, a zavas ar vrava hag ar binvidika jiletenn giz-Vigoudenn, gand e nadoz dir ha seiz pellennad neud aour.

### **An displeger**

Hag an hini koz, harpet e gein ouz kalvar Tronoen, a gontas din marvaill an dillad aour, eur goñchenn euz an amzer-wechall, ha n'ez eus enni netra gaou, med marteze eur ger pe zaou.

\*

\*\*

### **An displeger**

Eur wech e oa, etre palud Tregenneg ha palud Tronoen, eur plah yaouank a zeiteg vloaz hag a oa ken kaer a gorv, ken fur a spered ha ken glan a ene ma ne grede ket an heol mond da gousked er mor, beb abardaez-noz, heb kaoud keuz d'ar plah yaouank dispar. Rag daoulagad Barbaig ar Palud a oa ken glaz hag ar mor sioul, kuchennou bleo Barbaig ar Palud ken melen ha mel an heol da greisteiz.

Allaz, Barbaig a oa merh da Yann ar Palud, eun denig mad hag eun denig treud. Treud abalamour e vanke aliez ar bara du en e di-soul, kluchet e pleg ar palud, a-dreñv chapel Tronoen. Treud abalamour e ranne Yannig paour an dorzig vara etre e nao a vugale a-raog tañva kreun pe minvig, siwaz dezañ. Ha Barbaig a oa e verh kosa, an hini a dalveze da vamm d'he breudeur ha d'he c'hoarezed, peogwir ar vamm a oa maro. Treud an traou, treud an dud ha dibaod ar gwenneien war ar palud.

Barbaig a ree war-dro an ti, war-dro an tiad bugale, a zastume bezin ha birinig, a durie an douar seh, a beskete war ar mor rust en eur hoz tamm bag hanter vrein. N'he-doa war he hein nemed eun tamm broz dizlivet hag eur jiletenn lien-tiegez kant gwech paseadennet. Med ar plah n'en em chale ket hag en em gave mad-tre pa zelle ouz ar Werhez Vari, war kalvar benniget Tronoen, ha n'he deus ket zoken eun hiviz da gloza he bruched.

### **Barbaig**

Koulskoude e karfen mond eur wech da bardonia da chapel Treminou. Med merhed Pont-'n-Abad a raio goap ouzin pa vin gwelet ganto o tond d'ar pardon, treid noaz, warnon eur jiletenn lien, hag eun tamm bigoudennig war va fenn, ken

divalo hag an divaloa paour-kêz a houlen an aluzenn dindan porched an ilizou. Merhed Pont-'n-Abad a zo ganto beteg teir broz an eil war eben, jiletennou mezer gand mañcheier ledan, savet warno broderez gand neud aour en-dro d'ar houzougenn. Hag o hoefou 'ta ! ken tano hag eun neiz-kevnid, dalhet gand ampouez glaz, liou an neñv ! Petra rafe eur paour-kêz plah evel don-me e prosesion ar banneliou, e-touez kemend a bompad ! Gwelloh eo din chom er gêr.

### **An displeger**

Barbaig a gerzas dre ar Palud da gutuill bleuniou da lakaad war an aoter, e chapel Tronoen. Allaz, war ar palud treud, ne gaver nemed bleuniou treud, raden hag askol.

### **Barbaig**

Koulskoude, Santez Anna hag ar Werhez o-defe plijadur, marteze, gweled dirazo, e chapel Treminou, yeotenn ar palud hag askol ar Vilienn. En-dro da Bont-'n-Abad ez eus bleuniou ruz, ha glaz, ha melen-aour. E liorzou Pont-'n-Abad, e tiwan bokedou roz. Med Santez Anna hag ar Werhez a oa marteze ken paour ha me. Marteze e rafe plijadur dezo gweled plantennou ar palud seh e-kichenn ar bokedou pinvidig. Ouspenn-ze, n'eus ket mez da gaoud abalamour d'ar baourentez. Me a yelo da bardon Treminou gand eur vriad geot hag askol.

### **Gourgon ar Hemener**

Petra glevan du-ze, war an hent, a-dreñv chapel Treminou ? Eun toullad merhed yaouank o c'hoarzin leiz o genou ? Petra 'hoari gand ar pennou skañv-se ? Sell ! N'emaint ket oh ober goap ouz eur paour-kêz plahig gwisket gand truillou. Eur glaskerez vara bennag. Mez e tlefent kaoud, merhed ar vourhizien binvidig, o c'hoarzin diwar-goust ar baourez vihan-ze ! Setu emei o leñva dindan ar gwez hag o skuillad dour he daoulagad war he bruched. Eur rann-galon eo ! Me a rank mond da weled tostoh.

Plah yaouank, perag e leñvit ken doureg ? Hirio ema pardon Treminou, devez ar joa hag al levenez koulz war an douar hag en neñv. Ha c'hwi a zo glaharet beteg paka liou ar maro, beteg kaoud mil boan o chom a-zav war ho tivesker. Petra zo c'hoarvezet, en an' Doue ? Petra o-deus lavaret ouzoh ar merhed "chistrouennou", ar merhed "cheuh" am-eus gwelet bremaig o skrignal en-dro deoh. Arabad kaoud kemend a boan. Pez a lavar an teodou-skañv a zo dispennet war an taol gand an avel-mor.

### **Barbaig**

Arabad kaoud kas outo, paotr yaouank. Roet o-deus din da houzaud ne oa ket amañ va flas. Eur plah deuz ar palud seh a zo re druill, re zister, evid dond e-touez ar vourhizien. Pep hini a dle chom en e reñk. Leuskit ahanon. Ne vin ket gwelet ken war an tu-mañ.

### **Gourgon**

Penaoz 'ta ? E liorz chapel Treminou, an oll dud a zo en o zi, koulz ar paour hag ar brasa noblañs. Med, pa zellan ouzoh, me oar bremañ perag ema ar merhed o kana goaperez deoh.

### **Barbaig**

M'hen goar ivez. Desket am-eus diganto ha klevet aliez a-walh. N'am-eus ket memez eur rummad boutou deread da zond d'ar pardon. Va hoef a zo paseadennet n'ouzon ket ped gwech, ha va jiletenn a zo eet e truillou dre veza douget ganin sul-gouel-pemdez, ablamour n'am-eus hini all ebed da wiska. Mez a dlefen kaoud d'en em ziskouez dirag an dud, da zevez eur pardon braz. C'hoaz, ma vefen bet chomet dindan ar porched gand ar baour-keiz hag ar glaskerienvara. Med kredet am-eus pignad da laez an iliz, beteg an aoter, da ginnig eur vriad bleuniou divalo ha seh, dastumet war ar palud, e-kichenn Tronoen.

### **Gourgon**

N'eo ket ablamour d'ar bleuniou divalo na d'ar jiletenn druillenneg a ra goap ar merhed ouzoh. Ablamour d'ho praventez ne lavaran ket. Bez' ez eus merhed kaer e Pont-'n-Abad, med c'hwi, plah yaouank ar palud seh, a zo kaerroh eged ar haerra en o zouez, heb dillad mezer na koefou skañv.

### **Barbaig**

Leuskit ahanon da vond d'ar gêr, paotr yaouank. Perag en em lakit a-du gand merhed Pont-'n-Abad evid ranna din va halon ? Rag c'hwi a zo goaper ivez.

### **Gourgon**

Ar wirionez a lavaran. 'M-eus aon, plah yaouank, n'ho-peus ket gwelet biskoaz ho pizaj nemed er poullou-dour zall a zo a-dreñv ar Vilienn. Merhed Pont-'n-Abad o-deus meleziouriou argant evid lakaad o hoefou. Med fin a-walh int ivez da houzoud dioustu, gand eun taol lagad, piou a zo bravoh ha kaerroh plah egeto. Ablamour d'an droug-kalon o-deus goapaet ahanoh.

### **Barbaig**

Marteze eo gwir, marteze e hellan kaoud fiziañs ennoh. Med penaoz eh anavezit ken brao ar merhed yaouank, penaoz e welit ken sklêr en o halon ?

### **Gourgon**

Me a zo kemener, ya, kemener-neud e Lanvern. Em zi e teu ar merhed da lakaad farda dillad brao. Hag e klevan anezo o tispenna o broz an eil d'eben : homañ a fell dezi kaoud mañcheier ledannoh eged homañ-all ablamour eo pinvidikoh ; eun all a houlenn eur rizenn broderez muioh en-dro d'he gouzougenn eged he henseurtez ablamour he zad en-deus muioh a zouar ; eun all c'hoaz, re baour evid prena teir broz e-giz ar pennherezed, a ra staga diou lezenn vezer, unan ruz hag unan hlaz, war he lostenn-dindan, evid ober da gredi d'an dud he-deus teir broz penn-da-benn. Me a zent outo ha netra ne lavaran, rag va micher a zo gwiska an dud ha serra va genou. Med gouzoud mad a ran he-deus homañ eur skoaz izelloh eged ar skoaz all, he-deus honnez kein a-dreuz, petra c'hoaz ? Ne heller ket lavared gevier d'ar hemener. Ha pez ouzon mad, c'hwi eo ar vrava plah am-eus gwelet biskoaz.

### **Barbaig**

Chom da lavared, paotr yaouank. Marteze ho-peus c'hoant ez afen d'ho kaved evid ober sevel din eun abid nevez. Koll a rit hoh amzer ganin. Na bremañ na biken n'am-bo ket gwenneien a-walh da brena an disterra broz vezer. Leuskit ahanon da vond d'ar gêr.

**Gourgon**

Kerzit d'ar gêr, plah ar palud seh. Eun dra a houlennan diganeoh hag eun dra all hervez ar respont d'an dra genta.

**Barbaig**

Goulennit pez a hellan gouzoud, med n'ouzon ket kalz a dra.

**Gourgon**

Pez a houlennan, n'eus nemedon hag a ouife ar respont ; plah yaouank, daoust ha kavet ho-peus eur paotr yaouank da zimezi ?

**Barbaig**

Me, dimezi ? Siwaz din. Piou a deufe da glask ahanon war ar palud ? Den ebed, morse na birviken. C'hwi a ra goap adarre.

**Gourgon**

Mad. D'an eil goulenn bremañ : roit din ar vriad geot hag askol ho-peus kutuillet evid aoter ar chapel.

**Barbaig**

Penaos ? Ar geot seh-se ! An askol gweñvet dija ! Petra 'fell deoh ober ganto ?

**Gourgon**

O roit din. Hag a-benn eur bloaz ahann, d'an devez a-raog pardon Treminou, me a yelo beteg ho ti-soul, war ar palud, hag a restaolo deoh ar geot hag ar plantennou-ze freskoh eged biskoaz.

**Barbaig**

Freskoh eged biskoaz, med penaos ?

**Gourgon**

N'ho-peus ket fiziañs ennon ? Ne houlennan ket kalz a dra koulskoude.

**Barbaig**

Fiziañs am-eus. Kemerit. Bremañ e welan n'ema ket ganeoh ho penn mad, paotr paour, med n'eus forz. Kemerit, ha ra skuillfe an aotrou Doue e vennoz warnoh.

**Gourgon**

(*C'hoarzin a ra*). C'hwi a zoñj deoh on eur paour diskiant, eun inosant. N'on ket, plah yaouank. Me a lavar kenavo beteg ar bloavez a zeu, an devez a-raog pardon Treminou. Ha dalhit soñj ouz Gourgon ar Hemener, paotr Lanvern.

\*

\*\*

**Displeger**

Tremen a reas eur bloavez. Ha kaer he-doa Barbaig ar Palud en em deurel d'al

labour noz ha deiz, dalhmad e wele dirag he daoulagad dremm garuz ar hemener yaouank. Beteg ma tegouezas warni derhent pardon Treminou. O tiwall an deñved e disheol chapel Tronoen, e welas-hi ar hemener o tond a-dreuz ar palud.

\*

\*\*

### **Gourgon**

Bennoz deoh, plah yaouank. Setu on degouezet, hervez ar bromesa am-oa greet deoh, eur bloavez zo.

### **Barbaig**

Gweled a ran ahanoh, Gourgon Lanvern, ar hemener. Med prometet ho-poa din ho-pefe restaolet ar vriad bokedou palud am-boa roet deoh, da neuze. Ne welan boked ebed ganeoh. Moarvad int breinet pell zo war ar bern teil.

### **Gourgon**

N'eo ket gwir. Dihweñvet eo ar bokedou ha fresk e chomfont e-pad pell amzer, fresket e vint c'hoaz goude or maro deom on-daou. Setu emaint amañ dindan al liñser wenn.

### **Barbaig**

Dindan al liñser ?

### **Gourgon**

Tennit ar spillou ha digorit. Ar bokedou a zo e-barz.

### **Barbaig**

O, va Doue ! Eur jiletenn vezer nevez. Da biou eo honnez ? N'eus plah ebed, war an tu-mañ, hag a zo pinvidig a-walh da brena eur seurt jiletenn. (*C'hoarzin a ra*). Me ouie mad ne oa ket bleuniou el liñser-ze. Paket on bet ganeoh, kemener.

### **Gourgon**

N'ho-peus ket displeget ar jiletenn, plah yaouank.

### **Barbaig**

Perag e tisplegfen eur jiletenn ha n'eo ket din ? Ha va daouarn a zo louz, 'm-eus aon.

### **Gourgon**

Koulskoude, ar bokedou a zo e-barz, hag ar bokedou a zo deoh.

### **Barbaig**

Ar bokedou... e-barz ! O, pegen brao eo savet an neud aour war ar mezer ! Med... neudet eo penn-da-benn ? Biskoaz n'eus bet gwelet eur jiletenn neudet penn-da-benn. N'eus rouanez ebed, er Vro-Vigoudenn. Med... ar bokedou ?

### **Gourgon**

Ar bokedou a zo treset gand neud aour war ar jiletenn. Me zoñj din int kalz

bravoh eged ma oant, eur bloaz 'zo, war ho parlenn. Treset am-eus ivez kerniel maout ha pluñv-pavon evid ourgouill ar re vraz, hag heol lintruz ar palud seh war an oll draou, ar stered en-dro dezañ ; ha raden seh ar palud evid lodenn ar re baour, ha...

### **Barbaig**

Ya... ya... gweled mad a ran. Dastumit buan an traou brao-ze, Gourgon, gand aon e pakfen droug-kalon, me ivez. Me n'on nemed eur plah e-giz ar re all, ha pa welan eur jiletenn ken brao, am-eus c'hoant leñva pa zoñjan n'am-bo biken nemed lien tiegez war va horv.

### **Gourgon**

Ar jiletenn a zo deoh, Barbaig ar Palud, peogwir eo staget ouz ar boked bleuniou. Hag ar bleuniou a zo deoh, peogwir ho-peus prestet anezo din, eur bloaz 'zo.

### **Barbaig**

Med... med... O, Santez Vari, ne welan ket sklêr en-dro din...

### **Gourgon**

Digorit ho taoulagad ! Sellit, amañ, war ar jiletenn, 'm-eus treset diou galon aour : hoh-hini ha va-hini. Ha dindan amañ ar jadenn didermen, chadenn va buhez a roan deoh. Ma n'ho-peus bet paotr yaouank ebed c'hoaz da zimezi, me en em ginnig deoh da waz. Ma lavarit "ya", c'hwi a deuio warhoaz d'am zi, da Lanvern, mintin mad, gand ho tad. Hag em zi, am-eus c'hoaz eur vroz neudet aour evid mond da heul ar jiletenn. Ha ni a yelo on-daou da bardon chapel Treminou, e leh m'ho-peus leñvet kemend-all, bloaz 'zo, ablamour d'ar merhed digalon o-deus goapeet ho tillad paour...

\*

\*\*

### **An hini koz**

Ha setu penaoz va zad Gourgon ar Hemener, Doue d'e bardono, a zavas neud war ar mezer penn-da-benn, evid ar wech kenta, dre garantez evid Barbaig ar Palud, va mamm muia-karet. Ha d'an deiz war-lerh, da bardon Treminou, e torras etre daou, dirazi, e nadoz dir m'en-doa poaniet ganti war ar jiletenn hag ar vroz e-pad eur bloaz.

### **An displeger**

Hervez giz ar gemenerien goz, neketa. Ar re-ze, hervez ar brud, pa veze paet dezo eun abid neudet nevez, a dorre dirag ar perhenn an nadoziou o-doa selvichet dezo evid an abid-se.

### **An hini koz**

Gwir eo. Med pa welas ar merhed jiletenn va mamm, pep hini a hoantaas kaoud kement-se, da vihanna, ar re o-doa danvez a-walh. Ha setu perag am-eus lavaret deoh penaoz ar jiletenn-mañ eo mamm ar jiletennou, er Vro-Vigoudenn. Ha keit ha ma pado-hi, paotr yaouank, e vo kavet kemenerien neud da zével



dillajou aour, etre Plozeved ha Plomeur.

*Bet skignet war Radio-Kimerh, an 10<sup>ved</sup> a viz even 1957.*